

Mar deo bet trec'het Breiz e brezeliou bras,
 He Yez a zo bepred ken beo ha biskoaz,
 He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz;
 Dihunet out breman, va Breiz !

Henvedigez dioc'h ar c'heumraeg gant TALDIR.

DOUE HA BREIZ BEPRED


KOUSK BREIZ-IZEL



An heol a zo ku - zet,



se - tu e - chu an de ;



Me glev ar c'hloc'h o tin - tal an A - ve. Kousk,



kousk, Breiz I - zel bro dis - par, Se -



tu an noz o tont war an dou - ar. Kousk, Breiz



I - zel bro ker mad, Trouz ar mor bras a zav d'az



lus - kel - lat.

An heol a zo kuzet, setu echu an de :
 Me glev ar c'hloc'h o tinal an Ave.

DISKAN :

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
 Setu an noz o tont war an douar ;
 Kousk, Breiz-Izel, bro ker mad,
 Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

C'houez-vad an ed e bleun hag al lan alaouret
 War ar mésiou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gan o festum o loened ;
 Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traouiennou didrouz me glev kan an
 [eostig ;

Telennet noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz' o skedi an nenv steredennet
 A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret.

An nep a c'houez bemdez a c'hounid e renoz,
 D'an dud vad Doue en deus graet an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
 Bro all ker kaer n'eus ket war an douar.

J. MARÉCHAL.

448

Sav, Breiz-Izel !

T n'heumraeg - « Gwyr Harlech ».




Sav, Breiz-I-zel, da vanniellou,



Ruziet gant gwad hon c'hendadou,



La - va - romp holl a-bouez hon penn



Breiz da vir - vi - ken.

Sav, Breiz-Izel, da vanniellou
 Ruziet gant gwad hon c'hendadou,
 Lavaromp holl a-bouez hon penn
 Breiz da virviken !

Dihun Breiz va Mamm venniget
 Rag an deiz a zo digouezet,
 Setu ar youc'h war bep kriben
 Breiz da virviken !

Ar youc'h a zo aet 'dreuz d'an ér
 Bete goueled hon lanneier,
 Dalek Gwened bete Porz-Gwen
 Breiz da virviken !

Dic'houninet eo ar c'hlezeier,
 Me glev lemma ar sabrinier,
 Met 'us d'an trouz e klev an dea
 Breiz da virviken !

Mene-Bre ha Mene Kragou
 O deus distonet hon galvou,
 Gwagen ar mor 'lar d'ar wagen
 Breiz da virviken !

Ar Vretoned a zo kaled,
 Eus eur penn d'ar penn all d'ar bed
 O deus touet difenn o gouenn :
 Breiz da virviken !

Beteg ar gouelec'h ar pella
 Ar c'horn a vrezel a vouda,
 An avel youc'h en eur dremen
 Breiz da virviken !

Ar c'halonou 'zo entanet
 Hag an divrec'h a zo nerzet !
 Doue, ro an Trec'h d'az mibien :
 Breiz da virviken !

TALDIR.